

Pobl Vreizh

4

Mae 1981 - niv. 133



E Douarnenes, manifestadeg an UDB, d'ar sadorn 29 a vis Meurzh, a-eneb d'an nukleel.

DILEURIDI EUS AR BOBL SAHARAoui E BREIZH

E fin mis Meurzh ez eus bet gvelet e meur a gêr vras eus Breizh diw gannades eus ar **Bobl Saharaoui**, deuet da gomz eus o fobl hag eus o bro. Gwraet o deus o zro-Vreizh, ha displeget o deus dirag meur a gant tud ar c'hudennoù bras a gav ar bobl-se diragzi ewid chom en he sav.

Hanw zo bet alies, hag e vez c'hoazh, war ar c'hasetennoù, eus ar **Polisario**, anezhañ ar strollad politikel hag ar strollad-arme war ar memes tro, o kass war-raog stourm ar **Saharaoui** ewid o dieubidigezh.

Bez ez eo an dachenn-douar ma vev ar **Saharaoui** warni, ar **Rio de Oro** kozh ewid darn, hag ar **Saguia el-Hamra** ewid un darn all, douaroù ma oa **Bro-Spagn** mestr warno da vare an trevadenniñ. Aet Spagnolis diwar o zro, e c'hoantaas ar **Saharaoui** tapoud krog en o amzer-dazont int-i o hunan. Dreistoll pa ouie an oll e oa ouzhpenn traehz war an tamm douar-se : dindanañ pa ne ve kën e oa « tenzorioù » a beb sort, fosfat, ha moarvad tir-eoul hag uraniom. A-ziwar e dron uhel e taolas **Hassan II**, roue krennamzerel ar **Marok**, ur sell leun a avi war Sahara ar C'hornog ase, ma pourmene ar **Saharaoui** o c'hañvaled a-hed hag a-dreus anezhañ. Kement ha ken bihan ma reas ar roue e soñj kreskiñ e rouantelezh diwargoust douaroù ar **Saharaoui**. Kement ha



Er Thomson-CSF Brest

lakaad ur pallenn war ziasterioù-diabarzh ar **Marok**, e tivisas ar roue-meur ober ur gerzhadeg, oll dud e bobl, sañset, o vont d'e heul, ewid aloubiñ douaroù kreisteiz ar **Marok**, bet, gweghall, gouez d'ar roue, e dalc'h an impalaeriezh cherifian. Ar **Gerzhadeg C'hlas** eo an hanv bet roet d'ar « groasiadeg » lu-se...

Wardro ar memes amzer e oa ar **Maoritani** kountant awalc'h da gaoud he lod iwe eus **Bro ar Saharaoui**, ma vefe gwraet ar partaj. Ar **Frañs** a oa e-barzh ar jeu iwe, hag e oa un nebeud Frañsion o'h ober wardro mengleuzioù **Zouairat**, lod ewid tennañ ar c'hailh er-maes anezo, ha lakaad kass anezo da **Usinor Dukark**, lod all ewid « difenn » ar vengleuzieren ha miroud

douzh paotred ar **Polisario** da lakaad an arigrap warne... A-benn ar fin e voe tapet c'hwec'h « ostaj », en o zoues daou Vreizhad, unan anezo eus **Karaes**, egile eus **Speied**... En amzer-se eendeun (mis Du 1977), e teuas **Fañch Morvannou** a-benn da weled unan eus pennoù bras ar **Polisario**, e **Madrid**, hag en hanw an UDB, e komzas eus dibrisionadur an daou Vreizhad. Med en **Aljeri** eo e oa an diskoulm eus ar gudenn, rag skoazellet kær eo bet ar **Polisario** — hag ez eo c'hoazh — gant gouarnamant **Aljer**...

Setu, pa zeus da Vrest (d'ar 25 ha d'ar 26 eus mis Meurzh) **Keltum Salem** ha **Houela Mohammed Fadel**, an diw gannades eus ar bobl **Saharaoui**, e voe gwraet dezo un degemer eus ar c'hentañ gant paotred ha merc'hed an UDB. Skoulmet ez eus bet liammoù strishoc'h c'hoazh etre **pobl Vreizh** hag ar bobl **Saharaoui**. Eno, siwazh, ez eo gwelbiet douar an deserzh gant gwad ar stourmerien **Saharaoui**. Eno eo red en em gannañ gant fusuilhoù hag en ur denañ. Amañ eo braw deomp en o c'heñver... Petra bennag m'eo bras an diforc'h etre an daou stourm, adlavaret eo bet e oa hag e chom **pobl Vreizh** hag ar bobl **Saharaoui** unanet dorn-ha-dorn, hervez gerstur an UDB « Dorn-ha-dorn gant oll bobloù gwasket ar bed ! »



Er Greisenn Vreizheg a Arzoù-pobl e Brest

PENNAD-KAOS GANT YOUENN BRUSQ

Pris Per Trepos 1980

...En hor yezh-ni an hanw-se
A zasson, a strak, a darzh,
Gis trous klezeier Nevenoe,
Gis speuiadennoù Alan al Louarn,
E-gis garmoù dispac'h Ar Balp
Hag e vonedoù ruz :
« FRANKIS » !

Tennet eus Preder (Pobl Vreizh 118)

Frankis, ger-stur ur paotr en doa skrivet din tri bloaz so ewid mont e-barzh an UDB, ha ne grede ket dont da weled ahanon, peogwir e oa un tamm koshoc'h ewid paotred ar Strollad... ha peogwir (ouzhpenn) ez eus anezhañ un « Ancien Combattant ».

Yann ar Gow

P.V. : Youenn Brusq... Piw an den ?

Y.B. : Me zo ganet e Treboul hag emañ o chom e Treboul iwe, petra ! penaos on deuet d'ar brezhoneg ? Me 'm eus safaret brezhoneg ataw. Gant ma zud, ha deusouto 'm eus safaret brezhoneg iwe. Alies e safarent galleg, pas etreso, mes deusouton. Etre ar vugale ne vese ket safaret brezhoneg. goude-se, pa 'z on aet d'ar mor, ase e vese safaret brezhoneg ataw !

E-gis mouss 'm eus ambarket da gentañ, d'an oad a zaoz-zeg vloaz hanter. Gant ar brilli da gentañ, epad ur mis, ha goude-se on aet g'ar sardin, pa'm eus bet ma « Certificat d'Etudes », e 1935 ; hag on aet d'ar mor e fin mis Mae, hag on chomet er mor betek ar bloavezh tri ha daou-ugent. Ha goude-se n'on ket distroet d'ar mor.

P.V. : C'hwi 'oa ataw o chom e Treboul epad ar bresel ?

Y.B. : Pa voe diskleriet ar bresel, me 'm boa 17 vloaz, mes n'on ket chomet ataw e Treboul, rag ma zad a oa pesketour, setu ez aemp d'e heul d'ar Rochelle en hañv, ha da Saint-Jean-de-Luz er gouañv, petra ! Ewid ober ar sardin, ha goude-se pa teue an dro, ewid mont gant ar brilli. Hag on deuet da zeskiñ lenn brezhoneg neuse, pa oan o chom er gêr gant ma mamm-gozh. P'o deus savet ma zud ti, on chomet er gêr ganti. Ar vaoues kozh 'oa o'n em chalañ : « Ha piw a lenno din levr **Buhez ar Sent** bremañ ? ». — « Me 'lenno deoc'h memestra ». — « Ma mabig paour, c'hwi n'ousoc'h ket ar mod da lenn brezhoneg ! »

Neuse e oan eizh vloaz hanter —

naw vloaz, pa 'z on en em lakaet d'ar brezhoneg, hag ewidon e oa skrivet **Buhez ar Sent** en un doare-skrivañ droc'h.

Ma mamm-gozh ne ouie ket ar mod da lenn anezi, mes lennet 'vese dezi ur pennad a-wechoù, e-gis ma rae toud ar re gozh d'ar mare-se.

P.V. : Ha neuse, petra o'h deuet da vevañ epad ar bresel ?

Y.B. : Epad ar bresel 'on aet d'ar mor ataw, ha goude-se, pa 'z eo deuet an STO, e oa daw deomp chom en aot, ha mont da guzhad war ar maes, ewid nompas bezañ kavet gant an Alamanted. Setu on antreet er Resistants pa oan du-se e Plo-Zeved, hag on deuet d'ar gêr en-dro. N'on ket aet diouzhtu d'ar « maquis », da gentañ traou e-gis-se, hag a-benn ar fin on bet kaset d'ar « maquis », assambles gant c'hwec'h den ell, wardu Poullan. Ha pedavare on deuet d'ar gêr deus ar « maquis » ? Ya, d'ar 4 a vis Eost, ewid « libération » Douarnenes, hag amañ on bet gloaset, hag on chomet en ospital epad ur mis. Eklajou 'm boa tapet em divesker, ha re all zo bet blesset iwe, e-gis Marius Le Rouge. Goude-se on bet kaset da St Blaise e konvalo, hag epad ar mare-se, ar re all a oa aet da Lesven, lec'h zo bet lazhet kalz deusouto : unan deus ar re-se a oa Robert Goff, ma 'z eo bet roet e hanw d'ur blassenn e Treboul-gozh. Ha goude-se, ar re all zo bet lazhet gant an Amerikaned o doa kemeret anezo ewid Alamanted.

Komanant da gelaoüenn
c'halleg an UDB

Le Peuple Breton (service abonnements *)

BP 304 - 29273 BRÉST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

Boutin : 50 L (1)
Skoaz : 70 L (1)
Estrenvro : 60 L (1)

Amañ an arc'hanter
dre c'hekenn-boest (1)
dre vandat-lizher (1)
dre c'hekenn-vank (1)
CCP RENNES 2365-76

(1) Diwekht ar gerioù ne servijont ket

Araog fin ar bresel 'm eus en em anjaget bar marin hag on bet taolet er « c'holoniale », ha me martolod koulskoude, hag on chomet eno epad 16 vloaz.

P.V. : Petra 'soñje d'ur Breizhad er Resistañs eus an otonomist ?
Y.B. : Kemendall a zroug a vese lavaret deusouto : « Ar re-se zo a-du gant an Alamanted... ». Oamp ket kad da c'hweasa anezo. Ha memes pell goude-se... Moian zo bezañ tomm douch ar yezh hag ar vro anez bezañ a-du gant an Alamanted.

P.V. : Ha penaos oc'h deuet erfin da stourm ewid Breizh, da vezañ memes esel eus UDB ? Sikouret oc'h bet martese da zont e-barzh dre lenn danevell Yann-Vadezour An Deuñv war b/POBL VREIZH ?
Y.B. : N'on ket. Hag ahendall e oan dija e-barzh kasisur. Drol awalc'h eo bet. Pa weler 'pezh a ra ar Frañs, pe, kentoc'h, ar pezh na ra ket. An lanw du, ha ne vez gwraet netra ewid renkañ an traou. An dilabour ; ar fac a vez gwraet war ar brezhoneg.

Hag on deuet d'an UDB en ur lenn POBL VREIZH, ha LE PEUPLE BRETON, a'm boz prenet da gentañ. POBL VREIZH 'm eus kavet diases da lenn da gentañ. Goude-se 'm eus lavaret ouzhin ma hunan : « Perag ne'h afen ket 'barzh an UDB ? ». Soñjal a raed din da gentañ ne vefen ket kemeret, peogwir e oan un tamm koshoc'h, hag on bet « fayot ».

P.V. : Penaos e weles da-zont Breizh ?
Y.B. : Mechañs e teuo Breizh da vezañ ur vro lec'h ma vo moian bewañ, mes ne gav ket din e teuo diouzhus. Fiziñs awalc'h 'm eus memestra. An dud memes oad ganin ne raont ket forzh deus an drase. A-wechoù e safaromp deus Breizh : « Bof ! Chom da vont... », a vez respontet din. Ar yaouankis n'ouson ket, peogwir n'emaon ket em aes ganto.

Mechañs e teuo Breizh da gaoud hec'h otonomi. E broioù all em a e-gis-se, kemeromp ar Suiss pe ar C'hataloug... Paris da gentañ, ataw eo bet e-gis-se...
P.V. : Petra 'peus da lavared, Youenn, diwarbenn Plogoñv ?
Y.B. : 'Gav ket din e vo muioc'h a labour doc'hpenn ar sañtral nukleel. Pa vo savet ar sañtral, e vo labour da dud. Mes pa vo achu toud, ped den deus ar vro a vo implijet du-se, a soñj dit ? Hag ar CRS-se, hag ar soudarded a vo ase ! Un dra spontus e vo, sur. Gwelloc'h e vefe sevel ur sañtral-glaou...
P.V. : Hag ar porzh nukleel a vefe savet amañ ba Douarnenes, un dra 'vad vo ?
Y.B. : Aotrou Doue ! Petra 'vo



AR PEZH NA 'M EUS KET LAVARET DA V/MISS « MONDE »

N'eus ket pell bras 'm eus bet an enor-dreist da vezañ « interviewet », 'vel ma lavarer e galleg fin, (petra ? saosveg ? mad, lakamp), gant ur gasetenereus deus ar journal brudet, speredeg, nebtueg, h.a., h.a. « AR BED », (arabad bezañ re bizz, daoust d'ar fleur bezañ kizig awalc'h er maremañ deus ar bloaz).

Me, an droch ahonan, a soñje din e vije bet ar penaed-kaos diwarbenn hor yezh, da lavared eo ar brezhoneg, ha, padal, hi mont ha goul' ganin abalamour da betra ne oan ket a-du gant politikerezh ar Frañs — meulet ra vezo — e-keñver Breizh.

Me, Aotrou Doue ! nompas bezañ a-du gant politikerezh hor mamm santel ar Frañs — meulet ra vezo — ha me bezañ servijet Marianna epad kehidall amzer !

Klasket 'm eus lavared dezi un dra bennag diwarbenn al lano(tou) du, an dilabour, h.a., mes, esmaet gant an enor a raed din ha, dreistoll, abafet gant ar speredoù kaer a oa en-dro din, dreist peb tra gant an heni a oa em zu dehoù, (Boaset eo da vont, e kement lec'h a zo, ur rosenn gantañ en e veilh-dorn. Red eo soñjal e oa gweñvet ar fleuren en deiz-se, rag ne chome mui nemed an drein gantañ en e zorn, hag e lodenne anezo gant brokusted. Ewid pezh a sell ouzhin, e rankan anzav on bet servijet mad. Setu, daoust d'ar c'his bezañ d'ar nukleel, e c'hallan assuriñ deoc'h ne oa ket un disterrañ atomenn gregeg etresomp). Esmaet 'vel ma oan 'ta, ne 'm eus ket gallet lavared kalzig traou.

Dre chañs on bet tennet deus an enkadenn-se gant ur c'hamarad hag en deus kemeret ma flass dirag an enklaskeres.

Daoust pe zaoust e kendalc'han da lavared : « Nann ! Ar Frañs — meulet ra vezo — (lavaromp Paris kentoc'h), n'he deus, n'hall ket kaoud ur politikerezh fall, n'hall ket kaoud droug-soñjoù e-keñver he bugale ar c'hornog pellañ. Int, merched ha paotred ar « Far-West » an heni zo sujidi fall, lakepoded na gollont ket an tu da lakaad o gitonioù hag o « gwenn-hadu » da gemer an aer, ha d'ober toud beb sort kanfarderezh. Traou gis stagañ ur vñsaskell pouz, lost ur porc'hell (al loemig pouz), pe ober allasigoù da zremm, ken nobl, toñtoñ Remoñ gant o banniel. Dismegañsñ ha lakaad an hu war ar polised, an archerien hag ar CRS-se — tud na lavaront ger ebet da zen. Goad hanw en EDF — ra vezo millig... meulet —, ma n'eo ket ur vezh. Lakaad haz war an trenioù (aes eo gweled emaoñ er « Far-West » !). Ha kement-se war ab digareziou deus an disterrañ sort. Da skwer : lano(tou) du, dilabour, nukleel, seweradur, ha me oar !.

Al lano(tou) du ! Ur pezh kaer ! Ha gwelloc'h peus ur draezhenn lous bennag ur wech deuet an hañv ? Lavariñ din 'ta, Nann ! Rag toud ar pezh a oa d'ober zo bet gwraet. Bewech, Ha gant an ostlihoù ar muiañ « sofistikek » (deuet eo ganin), beteg bouestoù houarn-gwenn, beskennoù ; ha kement-se digernes. War a lavarer, e oa tud, zoken, gant spoutus ! (daoust d'ar ger bezañ hañval awalc'h, n'eo ket merk ar spoutus an heni eo). « Ya, med ! », a lavaroc'h din, « hag ar besketarienn ? ». Rag ne zeu ket toud ar mazout d'ar c'hostez (d'an aod) anezañ ; mont a ra lod d'ar strad iwe. Diouzha lavarer, e raer dezañ mont d'ar « sont » (d'ar strad, gouele-

kaset d'ar porzh-se ? Toud loustoni Plogoñv a vo kaset ase. Dija n'eus ket kalz a labour, nag e Douarnenes, nag e Plogoñv, nag e lec'h all. Setu, ma vez savet ar sañtral, e vo gwas-hoc'h c'hoazh. Soñjal a ra dit e teuo ar besketarienn a-benn da werzhañ o fesked ? Ul label fall vefe roet da besked Douarnenes ha trowardro. Dija 'zo bet serret ur fritur ba Treboul, bloaz passet, an heni zivezañ.

Kemendall zo bet ! Soñj 'm eus, pa oan mouss... Er friturioù e oa labour. Pesked e-gis ma oa, ha bagoù e-gis ma oa ! Ar friturioù, bremañ, a ya d'an Afrik, peogwir eo marc'hamatoe'h du-se. N'eo ket ewid mad tud ar vro, ewid o mad o hunan ne lavaran ket. An dud, amañ, zo deuet re « digourdi ». Setu eo red mont d'an Afrik da c'houmad arc'hant diwagoust tud all.

P.V. : Ha neuse, Youenn, penaos

'ma kont gant ar skrivagner brudet oc'h deuet da vezañ ?

Y.B. : Me zo deuet da vezañ tomm douch ar yezh pa'm eus kavet levrioù e brezhoneg da breññ. Ba ul « librairie » e oa, ha kemeret 'm eus ul levr brezhoneg ewid sell deusoutañ hebbén, ha goude-se 'm eus prenet anezañ, he re all gould. Disofjet 'oa bet ar c'hoñchenn diwarbenn ar « Breiz atao brein ».

P.V. : Skrivañ 'reoc'h ur romant ?
Y.B. : O, ya, mechañs, pa'm bo amzer. Mes gouzoud a res ne c'haller ket labourad ha koll amzer da skrivañ. Eñvorennoù, martese, a vo skrivet ganin. Notennoù a gemeran diwarbenn ma buhez, ma bugaleaj kentoc'h, traou iskis ha spontus, pas skrijus, traou iskis a vese gwraet gant ar vugale ewid kaoud ur gwenneg ; gwerzhiñ avalou-pin, hag all.

Konchennoù iskis, boemus, a bij

din. Da gentañ 'm eus skrivet ur barzhoneg bet embannet war b/POBL VREIZH (niv. 110) : Kan pobl Cham-gal. Goude-se Diakar-amzer ha Pre-der, bet embannet iwe war b/POBL VREIZH.

Danevelloù 'm eus skrivet iwe : Ar c'hi adrevñ an nor (BRUD NEVEZ), Pen goullou — ar fin deusouti zo boemus —, ha goude-se War dreusou ar pales (Pris Per Trepos 1980), hag An Euzhvil 'm eus skrivet da gentañ e galleg. Barzhonegoù all e galleg 'm eus savet iwe, e-gis Sans rime mais non sans raison (AR FALZ), ha danevelloù all e galleg ataw.

P.V. : Mersi bras, Youenn Brusq. Bez' ez eus ahanoec'h un den hag a ro fiziñs d'ar yaouankis a stourm ewid ar brezhoneg hag emrenezh Breizh.

diñ). Mad ! Ha neuse ? Ne soñj ket deoc'h, koulskoude, emaoñ o vont da lesel ar lognes-se da zont da labezañ traeh an douristed ? Eo ? Ha soñj c'hennin a rit ? Forz penaos, ne chom ket mui a blass ewid e lakaad, rag ar c'hoajoù trowardro da Gemper zo leun-tenn. Setu, kea, ar besketarienn...

Ha memes, ma teufe ar pesked da vankoù, e c'hall ar besketarienn charc'h micher ; 'n em « reussikliñ », 'gis a lavarer bremañ. Perag ne 'h afent ket da zlouserien traezhennoù ? Han ! Ne soñj ket deoc'h e vefe ur vicher vad honnez ? Seblantoud a ra din gwelad an arwest marzhuse. Familhoù a-bezh, e-sér kemer an aer — meulet ra vezo. Peb heni o lakaad e boan, gant ar binuij ar c'hlokañ ewid ar sorch miche-se (gweled uheloc'h). Beteg ar re vihan tre o netaad ar bliennoùgou gant o broustig-dent. Ken na zeu an dour tew-tew em daoulagad gant an deneridigezh.

« Hag an dilabour ? » Petra, an dilabour ? Bras awalc'h eo ar bed ewid an heni en deus c'hoant da c'houmad e voued. Ne soñj ket deoc'h zo moian da gavoud labour lec'h-pelec'h ?

Gwerzhañ esañs er Sahara pe tapan balafenned en Amazonia ? Mes nann ! Deuet eo an dud da vezañ re lorc'hus, ar re yaouank dreistoll. Ha setu ar gitonioù, ar « gwenn-hadu », h.a., o lont er-maes adarre. Ha koulskoude n'eo ket al labour a vank. E Breizh zoken, ewid skuitañ ar riuoù pe 'wid riuañ ar c'hil, ar prevezioù. Peotramant e kostez an aod, assambles gant ar besketarienn. Hag an arme ? En arme ez engouestler hag, en tu all an arc'hant o defe ar c'hloar, rag arabad ankouaad Kolwezi nag an Tanio (traezhennoù adarre ?). Hag ar marin, han ? Er marin e c'hopraer iwe, hag o defe kement a c'hloar hag en arme ; dalc'hit soñj eus Kervourc'h (Cherbourg) en hañv passet. Ouzhpenn-se o deus iwe ar poliss, ar CRS h.a., mes red eo anzav eo kalz darjeh-russoc'h ar vicher-se, dreistoll dirag pobladoù (1) ar pellañ m'haller mont war ar c'hornog, hag a zo ampart-dreist ewid pezh a sell douch « al langaj hag ar flech » (2).

Ha koulskoude ne oar ket an dud-se, da lavared eo tud ar vro, petra' gollont en ur nac'han an TNP (3). Da gentañ, tourist ebet ewid direnkañ anezo. D'an eil, achu ganto torni o fenn ewid goud pelec'h gwerzhañ o fesked. D'an trede, aon ebet mui da gaoud rag al laeron, diwallek mad 'gis

ma vint gant ur builhentez a loerietachou. Hag an enor ? Han ! An enor da sklérjennañ ar gér kapital.

Me gav din ez eo Volterra skrivet da Gattell II. « C'est du Nord aujourd'hui que nous vient la lumière ». Ha Paris, tud Plogoñv a laro « He ! lemek ! vla kist diwest konjulu metitna ! » (4).

Awalc'h eo din serriñ ma daoulagad ewid arvestiñ an daolenn-mañ, ur wech deuet an abardaz. Ar goulou war alum bras (« pa zo zo, ha ma n'eus ket e vo »). Krenmlavard deuet da vezañ diouzha er c'his gwashoc'h eged biskoazh. An oll Barsianed, a belec'h bennag e vefent, deus an Elysee pe deus Plassenn ar Choral Fabien daoulnet, troet warad Beg-ar-Ras o trugarekaad, gant o mouezh o taskerana, tud ar C'hab ewid o madelezh hag o meizerzh en o c'heñver, int, tud pouar ar reter, en dibourvez. A ! Nag un arwest esmaet (me ! red eo din kemer ur mouchouer all, rag hemañ zo gulab-dour-teil).

Hag a soñj deoc'h, goude-se, 'm befe ar galon da nac'han doare-ren ar Frañs — meulet ra vezo — e-keñver Breizh ?!

Setu ase, ma vijen bet un disterig speredekoc'h, ar pezh e tijeñ bezañ lavaret da v/ Miss « Monde », mes, evel ma ouezit : « al louarn a rank merwel en e groc'hen ».

Bremañ emaoñ o vont da lakaad ma fenn er « frigo », ewid e freskaad un tammig.

FEST-NOS
 ewid sikour ar gelaouenn
Wanig ha Wenig
 d'ar 16 a vis Mae,
 e Poulouen, gant
 « Diaouled ar Menez »,
 ha Le Roux ha Dilasser.

(1) « Pobladoù » a skrivun, med diouzha ar yezh e charc'h an hanw. E vakerieg, da skwer, e lavarer « des éléments incontrôlés extérieurs à la région », pe « des excités ». E jorjeg e vez lavaret : « des petits bourgeois ».
 (2) Ar guntreñ hag ar bajal.
 (3) Ma n'eo ket hanter-gouset dija, martese ho peus remaket ne oa ket kaas gantomp a deat (nemañ ne lavaran ket). Setu eo red din lavared deoc'h e sinili TNP : Tredarna Nukleel Plogoñv.
 (4) Ne 'm eus gwraet fass ebet, mechañs ?

Youenn Brihsod

KRONIKENN AR SKIANTOÙ

Petore amzer a-benn arc'hoazh ?

Daoust hag-eñv ne deufe ket an amzer da direzhañ tamm-ha-tamm diwar leweson oberiantis mab-den ? Ar gouleñn-se zo d'ober, rak e-kerz an deg bloaz tremenet ez eus bet ur strobard gwalleurioù klimatik amañ hag ahont war an douar : etre 1968 ha 1973 ar sec'hour er Sahel, en 1972 ar sec'hour en Unvaniezh Soviedel, amzer yen er Brasil en 1975, ar sec'hour en Europa ar C'hornog en 1976... Rakweled an amzer war grenn pe hir dermen zo diaes, rag n'eo ar meteorologiezh ur skiant ressis ewid c'hoazh, med bez' ez eus memestra teoriennoù o vrastressiñ emdroadur an amzer ewid ar c'hant bloaz da zond. Ar fentussañ tra zo emaint eneb rik an eil d'eben.

Deus un tu emañ an heni a glask prouñ ez a an amzer war dommaad diwar greskamant ar c'hementad gas karbonik en atmosferenn. Dont a rafe ar fenomen-se gand distruj ar forestoù trevanel (1% er bed beb bloaz) : en em dis-kempenn a ra an danvez organik en ur dileuskel gas karbonik. Dont a rafe iwe diwar ma vez dewet ber-nioud produiñ o tout eus ar petrol. Sañset e rankfe bezañ daougementet ar gas karbonik a-benn kant bloaz aham. Perag ez a war gre'h temperadur an aer pa vez muioc'h a c'has karbonik ? Produiñ a ra hemañ un « efed ti-gwer » : skinoù an heol o kouezañ war an douar, un darn anehe a vez adembannet en doare skinoù infra-ruz. Ar gudenn zo e vez euvret ar skinoù infra-ruz gant ar gas karbonik. Da lavared eo, muioc'h a se e vo eus ar gas-se en atmosferenn ha tommoc'h e vo gorre an douar. A-benn 100 bloaz e tlefe sevel an temperadur eus 3°C, ar pezh a lakfe da deusiñ ar morskornegoù.

Assaet en deus ur meteorolo-gour, an Doktor Brian Tucker,

gwiriekad an deorienn. Herwez ar c'halkuloù, e tlefe bezañ bet savet temperadur gorre an douar eus 0,3°C gand 10% kreskamant ar c'hementad gas karbonik epad an 30 bloaz tremenet. Un talvoud krenn eo 0,3°C, re yunud ewid bezañ musuliet. Med e Sud-Aostria e vefe bet bras awalc'h ar c'hresk temperadur ewid bezañ merket. Klasket en deus an Doktor

Tucker keñveriañ an titouroù dastumet en stasionoù amzer Sud-Aostria gant ar rakwel teorikel : klotañ tra resultatadoù peder stasion war eizh gant an deorienn, da lavared eo, e tiskouezont ur c'hresk a 0,8°C edoug an 30 bloaz tremenet. Kement tra da brederiañ...

An eil teorienn eo heni yenadur an atmosferenn. Herwez partisant an deorienn-mañ, ne vo ket « toulbac'het » skindur an heol dre efed ti-gwer ar gas karbonik, peogwir e vo diassoc'h-diaessañ dehañ treusiñ an aer, dre gaos al loustoniou a beb sort a vez dilaosket direson gant an industriou saotrus. Chom a raont etre douar hag oabl, ha niverussoc'h a-se ez int, bihannoc'h a-se ez eo an takadennou dour, pa 'n em stumm ar c'houmoul. Da heul kement-mañ, e ra nebeutoc'h a c'hlaw, hag ez eus diabarzh ar c'houmoul. Nebeutoc'h a skindur, yenc'h an amzer. Homañ eo teorienn ur meteorolo-gour brudet all, an Doktor Keith Bigg.

Setu enta daou savboent eneb. Beteghenn n'eo ket bet possubi gwiriekad nag an eil nag egile en un doare sur ha direbec'h. Martese ez eus un tamm eus ar wirionez gant an daou. Med ur poent zo emañ a-du warnañ an oll veterologourien : lewesoniñ a ra oberiantis mab-den ar c'hlima. Ema o c'hoari d'an deskard-sorser, poent bras eo dehañ deskiñ e vicher da vad, araog ma vo re diwezed.

Yann Ber Montreer



AR FALZ

kelaouenn dirmañs an Emañv diaset gant Yann Sohier, bodet ennañ skoleier ha kelennerien Vreizh a-du gant ur skol vrezhonek ha laik gwirion

Lennit Ar Falz ! Komantit d'Ar Falz !

140L ewid 4 niv. I

AR FALZ, Str. Kan Ar Gwez - 29245 PLOURIN-MONTRÔULES
KRP 430-20 H. ROAZON

AL LIAMM

ar gelaouenn nemeti o rouf, 6 gwec'h ar bloaz barzhonegoù, kontadennoù, pennoù a bets sort ha keleier
80 pajenn e pep niverenn - Renner - Ronan Huon
komantit : 50 L - Studierien : 35 L
Tehezore-merour : P. Le Bihan - 16, rue des Fours-à-Chaux
ST-SERVAN 35400 ST-MALO - CCP 5349-06 PARIS

UR SKOL VREZHONEG

E LONDRES

Pennad-kaos bet kompennet ha renket gant Janig Bodiou, esel eus an UDB o chom e Bro-Saos.

Kelenner war ar rusianeg e Skol-Veur Londres eo Jan Press. Ampart tre eo war ar yezhoù, ha tremenet en deus e zaktorelezh. Barreg eo da gomz saoneg eveljust, med iwe galleg, spagneg, rusianeg, finneg, alamaneg, lituaneg ha brezhoneg. Savet en deus ur skol vrezhoneg e Londres. Setu amañ ur pennad-kaos gantañ.

P.V. : Abaoe pegoulz eo bet digoret ar skol vrezhoneg e Londres ?
J.P. : Triwech' mis so eo bet digoret ar skol vrezhoneg e Londres, e City-Lit ?

P.V. : Petra eo ar City-Lit ?
J.P. : Ur skol pe ur skolaj ispisial eo, ewid an dud vras o deus c'hoant da genderc'hel pe da adkregiñ gant o studi. Meur a dra a vez desket ase : yezhoù a beb sort evel ar yezhoù kelteg, romaneg, slaveg, germaneg, sineg, japaneg, ha re all c'hoazh. Desket e vez iwe ar ouiziegezh, al lennegezh saoneg ha galleg da skwer.

P.V. : Ranket c'h eus iwe, da'm soñj, deskiñ ar brezhoneg. Perag 'ta ez out en em laketa da zeskñ ar yezh ?
J.P. : Eus Breizh eo ma gwreg hag he familh. A-viskoazh ez int bet o chom er vro. Eus Pondi e teunt. En em laketa on da zeskñ brezhoneg dre ma teomp alies d'ar vro. Pemp bloaz zo 'm boa kroget da studiañ gant Skol Ober. Ha goude-se 'm eus gwraet ma menno deskiñ ar brezhoneg d'ar re all e Breizh-Veur.

P.V. : Perag e felle dit ober ur skol vrezhoneg e Londres ?
J.P. : Evel 'm eus lâret dit, e plij din deskiñ ha komz yezhoù all. En tu-hont da se, e vez komzet c'hoazh yezhoù kelteg all e Breizh-Veur : ar c'hembraeg hag ar skosseg. Amañ, e City-Lit, zo tu da zeskñ kembraeg, skosseg, hag iwe kernoweg. Sur awalc'h e oa tu da lakaad ar brezhoneg gant e c'hoareseg kelteg. Gwraet he deus an Itron Ramson, pennerenes departamant ar yezhoù un degemer eus ar re wellañ d'ar brezhoneg, e-toues ar yezhoù kelteg all.

P.V. : Ped a dud e vez er skol vrezhoneg ?
J.P. : Wardro deg a dud e vez. Pouezet 'vez war ar yezh komzet eveljust, med iwe war an doare da lenn ha da skrivañ. Barreg tre eo ar studierion.
P.V. : Pessort tud ez int, ha perag e teunt da zeskñ brezhoneg ?
J.P. : Darn zo skolaerion pe gelennerion, darn all a labour ewid ar gouarnamant.
Bezañ zo iwe tud war an oad, amzer deze da bleal gant ar pezh a blij dezo ar muiañ.
Unan eus ar studierion zo kelenner e Skol-Veur Reading. Kelenn a ra lennegezh krennamzer Bro-C'hall, hag emañ iwe o kelenn istor ar roue Arzhur. Kavouds tre ar brezhoneg ewid e gelenadurezh.
P.V. : Gouzoud a ran 'c'h eus

gwraet labourioù-enklask war ar yezh...
J.P. : Ya, kompennet 'm eus ur minikasedig war ar yezhoù kelteg ewid Skol-Veur Exeter, hag eveljust 'm eus laketa ur pennad brezhoneg e-barzh. Martese eh ousout eo ket « gevellat » kër Exeter gant kër Roazon. Setu perag e oa bet gouillet diganin aosañ al labour-se ewid levratoeg Skol-Veur Exeter.

Un toullad pennoù savet ganin zo bet embannet war Al Liamm ha Skrid, diw gasenn brezhoneg evel ma ousout. Ha bremañ ez on o peura-chuiñ ur yezhadur brezhoneg, skrivet e saoneg.
P.V. : Perag ez out en em laketa da skrivañ ur yezhadur ewid ar brezhoneg e saoneg ?
J.P. : Embannet 'z eus bet daou yezhadur all er vro-mañ, med ne vezont ket kavet da bremañ ken, ha, sur mad, ne vezint ket advoulet. Muioc'h-mui a dud zo o studiañ ar brezhoneg, pe ar sewenadur. Setu m'eo bet gwraet ma soñj ganin aosañ ur yezhadur ewid an dud eus ar broioù na vez ket komzet enne na galleg na brezhoneg flour.

P.V. : Un dra bennag all c'h eus da lavared din ?
J.P. : Red eo din lavaroud iwe e vo tu da zeskñ brezhoneg e Skol-Veur Londres adaleg mis Here 1982. Ha spi 'm eus e vo meur a heni prest da grogiñ pe da genderc'hel gant ar brezhoneg.

DALC'HIT SOÑJ :
D'AN 13 HA
D'AR 14 A
VEZHEVEN
e Brest :
**GOUEL
POBL
VREIZH**

RADIO - U.D.B.
Tel. (16.98) 80.18.47

mikael madeg



penad troad ar troad

penad troad ar troad

KAMP EREKELTIEK AR VREZHONERIEK

(44, rue Jean Rameau, 29000 KEMPER)

E Skaer (Skol Sant Alan) e vo dalc'het staj 1981 KEAV.

En abeg d'ar C'hendalc'h Etrekeltiek, dalc'het er bloaz-mañ e Lannuon eus an 18 d'an 23 a vis Gouere, e vo berraet staj Skaer : ne bado nemed ur sizhunvezh.

Live ar berzhidi a zle bezañ ur bloavezh-skol-studi, rag, evel boas, ne vo nemed brezhoneg edoug ar sizhunvezh, N'eo ket ur staj ewid krogiñ gant ar yezh, med unan ewid he implijoud e peb degouez eus ar vuhez.

Kentelioù 'vez gwraet a beb live, bodadoù komz etre un nebeud tud, ewid ma c'hellfe peb heni kemer perzh er c'hendivisoù hag ober araka-dennou.

Pris ar c'hampad a-bezh : 300 L.

Ewid kaoud muioc'h a zisklariadurioù, skrivañ d'ar chomlec'h a-us.

Ar bed Keltiek

levrioù-pladennoù
arz keltiek
2. staed ar Roue Gralon
Kemper
pellg : 95.42.82

Newez deuet er-maes, e stumm ul levr roneotet 435 a bajiennou ennañ. N'eus ket amañ ur gontadenn, o vont eus ur penn d'al levr d'egile : 13 danevell zo oc'h ober al levr, bet roet dezhañ titl an danevell gentañ.

An danevelloù-se e kaver enno traou gwir, traou ijinet a-grenn (war a seblant) ha traou ijinet dezou un diasez gwirion. Diaes eo lâred pessort berzh e ray al levr : ar re a gomz brezhoneg ne lennont ket brezhoneg. Tamm ebet, pe nebeud tre. Ema ar yezh oc'h ober he zalaroù war ar maes e Breizh-Izel, daoust ma pad pell an tremevan, ha, padal, e teu tud — lod anezo eus en diavaes — da ganañ meuleudi d'ar yezh kozh, d'ober ganti, da gavoud enni kement perzh mad a zo ; siwazh ! pe e teont re ziwedaz, pe eo gwraet mad o foñt gant Breizhisel ar maesoù eo poent bras dezou mont war ur yezh all... Hag ez int aet. Tud all eo a zo aet war ar brezhoneg... Chom a ray e-gis-se un dornadig brezhonegerien, ha moarvad e vint tud desket bras, ken e brezhoneg, ken war yezh a zavez all. Ar re-se eo a lenno levrioù a sort gant hemañ. Ar re-se, marise, eo a viro ouzh Breizh a vont trema un antonelezh mamm d'an disesper... Ahendall, ema ar maesoù iwe o vont da vezañ didudet : ur Breizhiselad o vont da chom e kêr,

peurluliañ ne vez ket lakaet ar brezhoneg gantañ e karr bras an diloda-denn.

Meur ha meur a levr 'gis hemañ a ranker da gaoud, ewid ledannaad tachenn ar yezh dre skrid. Diwar meur a daol-essae, e teu a-benn ar fin un taol-micher.

Anad eo war ar brezhoneg-mañ dorn-skrivañ Leonis. Dija e vese kavet ponner a-wechoù brezhoneg Lan Inisan : « bernius ul brezhoneg » un tamm eo erediarezh al leoneg skrivet. Amañ iwe e kaver ar si-se, ma 'z eo ur si, a-benn ar fin. Diaes e vez d'un den bet boaset douzh dorn-skrivañ « mareadeg » ar galleg skrivet, plegañ d'un dorn-skrivañ berroc'h, hag a seblant klotañ gwelloc'h gant ijin ar brezhoneg koulskoude.

En tu all d'an dorn-skrivañ, e kavo peb heni amañ greun ha pell eveljust. Diwezatic'h, pa zistano d'an obe-rour, e vo mad dezañ kemer amzer, araog embann, da lakaad e c'hreun d'ober un tamm tremen dre ar wenteres : kempennoc'h-a-se e vo. Birwiñ 'ra ar re yaouank gant terzhien an embann, gwir eo ha n'eo ket ar re yaouank hebkén... Ordinal ne vez ket peurvad al labour gwraet e-kreis ar wres.

UR GREISENN VAKANSOÙ E BREZHONEG

Aotreet eo ar greisenn vakansoù gant « ar Yaouankis hag ar Sportoù » ; droed o deus e-mad-se ar gerent da gaoud ar « Bons de Vacances ».

Savet e vo ar greisenn ba SPEIED (29) er bloaz-mañ adarre, deus ar 5 betek a 28 a vis Eost, hag e tegemera bugale etre 6 ha 12 vloaz, o c'houzoud pe tamm brezhoneg ebet pe nebeud a vrezhoneg.

En ur zisoliñ an endro ha dre oberezhioù an dewezh eo e vo lakaet ar vugale da dañva ar

brezhoneg. Roet e vo ur plass bras d'ar c'han ha d'ar c'hoarioù. D'ar mellad (soule) e vo roet lañs en-dro er bloaz-mañ.

Ewid enskrivañ ur bugel pe kaoud titouroù all, skrivañ da :

AR FALZ
1, Plassen ar Marc'hallac'h
29210 MONTROULES
pe :
K V B B
11, staed Sant Alor
29000 KEMPER
Pellg : 90.20.38
Pris ar maread : 1200 L.

Paperenn ewid goulenñ mont e-barzh



Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h'i

Goulenñ a ran moneit e-barzh Unvaniezh Demokratel Breizh

D'an (d'ar) 19

Da gass en-dro (troc'het pe adskrivet) da

Sin :

UDB B.P. 304 - 29273 BREST-CEDEX

Mall eo skarzhiñ re an tu dehoù !

PENNAD-STUR

Ya, red eo diskar Jiskar, èl m' hon eus ni lâret a-c'houde seizh vlè. Mes bremañ ema ar presidant kozh e voned ar an deval : achu eo getoù e seizhvlèad, nand eo ket bet ur c'hours mad e'ld ar Vretoned. Ema Jiskar ar an diskenn : red eo reiñ sikour dehoñ da voned d'an dias tre, da gouzel e-barzh ar fosell.

Red eo bet dimp-ni amañ, ar re ahanomp a zo e karg ag ar gelaouenn POBL VREIZH, gortos fin mis Ebrl a-benn sevel ar pennad-stur-mañ. Ha marse ema bet gwel else, rag bremañ e c'hellomp huchal kreñv hag a vouzh ulve : « Bretoned ar c'hériou ha Bretoned ar maesoù, en eil tro, mouezhiñ ewid F. Mitterrand ! ».

En dro gentañ hor boa goulenet ged ar Vretoned, pe mouezhiñ « gwenn », pe chom heb moned da vouzhiñ. Sklaer eo ema bet selaout an UDB, rag e kériou bras èl Brest pe Naoned, eh eus bet tost da 25% hag o deus mouzhet douzh mouzherezh a 26 a vis Ebrl. Ha n'heller ket lâred e oa ar vouzherion-se mouzherion a vicher, pesketarion ar sul (yen-klass e oa an amzer), pe c'hoarierion kartoù. Nann, en o mesk e oa lod kaer a Vretoned hag venne else reiñ da ouled ne oant ket a-du ged ur sistem hag a voug personelezh Breizh. A du 'rall, petra weler pa lenner pizh disoc'hoù an dro gentañ ? Klasket o doa ar strolladoù — re an tu kleiz int-i iwe — ober, peb unan aneche, ar gont ag e vouzhiou, kemer ar musul ag e nerzh. Ha neusen ne faota ket lâred e venne strolladoù an tu kleiz diskar Jiskar, pa en dro gentañ awael.

Bremañ neuse ema sklaeroc'h ar jeu : un eus kén 'maed daou zen ar renk. Unan aneche zo anavet mad : epad seizh vlè en deus gwraet droed da « enevñ ha da gort Breizh », èl ma skrive Kalloc'h. An eil zo anavet iwe : an teirved gwezh eo dehoñ klask boud presidant. Ged peheni aneche eh ay ar maout ? Den ne oui : stard e vo ar jeu, sur.

Gwraet en deus ar PS ur lamm ar-raog arge : ar PCF en deus gwraet un tamm braw a lamm ar-dreiv ; ma vez lakaet assabl dregantadoù ar PS, PCF, PSU, MRG, LO hag un hanter vat ag heni an ekolojistet, ne dizeh ket c'hoazh an 50% (hag un dra bennag ouzhpenn) a zo rekis. Red eo eta lakaad iwe ar 26 a vis mouezhiou ar Vretoned chomet heb votin en dro gentañ, ma vo Mitterrand er wezh-mañ pennrener ar Stad.

Rag an heni fallañ eo Jiskar. Petra chom ar e lerch ? Ewid Breizh, èl ewid ar rest ag ar Frañs, an dilabour gwashoc'h e'ld biskoazh. Petra 'n deus gwraet Jiskar ged ar Frañs, ag ar Frañs ? Ur Stad lore'hus ha rog, ken impalaerel èl biskoazh, en diavaes èl en diabarzh, ur « sistem » e sikour kargin sakodou mestrou bras an argant. Ur « sistem » diasezet ar an dilabour ewid un niver brassoc'h-brassañ a labourision, diasezet iwe ar ur politikerezh e nac'h d'ar rannvroioù pell a-zoc'h Paris ar gwir da ren o aferioù e hunan, ur politikerezh ec'h ober a Vreizh ur « c'holoni » diabarzh, mem ma vez klasket, ar ar mem tro, kavoud « kolonioù » klask en Afrik pe en Asi...

N'heller ket lesel Jiskar e d'ron epad seizh vlè c'hoazh. Neusen e vehe diwadet Breizh a-grenn getoù. Gwerzhet 'vehe d'an arme, staliet 'vehe enni splujerioù nukleel arll, bemdez muioc'h. Savet 'vehe tredanvaou Ploegon hag ar Pellerin, lakaet edan ber heni Ploegon

da vout par da heni La Hague, heni Brennilis da vout un « dreistredaners ». Unan hag unan e vehe serret dor an nebeud bihan a usinoù-gwiaderezh a zo dre amañ c'hoazh. Al labour-douar, kreñv c'hoazh e Breizh na boud ema bet d'inerzhet, e vehe kempennet dehoñ ul lec'h a drived pe a bewarved renk, rag boud zo rannvroioù arll e Frañs kreñv enne al labour-douar iwe, hag o deus ar rannvroioù-se ar « chañs » da vout tostoc'h da gériou bras divent an Europ, tostoc'h eta douzh ar c'hreismou-kusumini... Goulet a ra ar Vretoned pessort politikerezh e vo heni Jiskar : ar mem heni. Setu perag n' eus namaed un dra d'ober, mouezhiñ ewid F. Mitterrand.

Heb termal, heb marc'hata. Na boud e ouiomp n'eus ket burzhudoù da c'hortos getoù. Ne vo ket F. Mitterrand un Aotrou Doue e strewiñ ar mirakloù en-dro dehoñ ewid brassañ plijadur ar Vretoned. Ne vo ket muioc'h a « presidant a-berzh Doue » ewid n'eus bet, na ne vo mui, a « roue a-berzh Doue » : ged ar pobiou an heni e vez skrivet an istor, ged ar pobiou an heni e vez tapet krog e-barzh ar varrenn-stur ewid kass war-raog kement hag a sell douzh o amzer-dis-zont. Mes red eo bremañ ober ur choas, hag unan mad : na boud n'hell ket F. Mitterrand sevel a-du ged an emrenezh ewid Breizh, boud zo anehoñ un den ag an tu kleiz, an tu kleiz laosk marse, med lod-kaer a berzhioù mad zo getoù ur sort. Alies e vez breinet an tu kleiz gall ged ar spered gall, da lâred eo ged ar vroadelouriezh c'hall, rog, impalaerel, c'hwezhet : sklaer eo n' hellomp ket ni, Bretoned, boud a-du ur ged ar vreadadurezh-se. An tu kleiz, an heni mad, a c'hell boud kavet e peb lec'h : spered ar frankis, ar fiziñs gwraet da val-denn, ar gassoni douzh ar bresl ha douzh mestroni un den, ur rummad, ur Stad ar un den all, ur rummad arll, ur pobl arll...

Ged an tu kleiz e voned e-barzh, eh eus un tamm fiziñs bennag da gaoud ewid Breizh : pa re, mes un tamm bennag memestra. Grataet en deus Mitterrand ur bochad troad da Vreizh : ged ma vo kreñv awalc'h ar Vretoned, emskianteg a-dra-sur, hag a zo oad e-barzh ar PS « ewid endout ur benveg a-fesson da lakaad « gwirioù » Breizh da vout sevennet » ged ma vint kreñv awalc'h da lakaad Mitterrand da vout fidel d'e bromessour. Emskianteg int, Bretoned int, tier o broadelouriezh alies, med emaint skoac'h, evel poñsind aonig, edan diwaskell ar yar gozh hanvet PS : mezhus, Bretoned mezhus, o reiñ koustañs vad d'o c'hamaraded arll ag ar PS — Bretoned pe get — nad int, i, nag emskianteg na mezhus, mes Galladoud a spered, evel ar pennrener, Mitterrand...

Ahanta ! Mezhus pe get, ra vouezhiou oll ar Vretoned ewid Mitterrand d'an 10 a vis Mae neuse : ne faota ket chom er gêr, ne faota ket mont da beskita. D'an 10 a vis Mae ema red dimp-ni Bretoned, dora-hadorn ged pobiou arll ar Frañs, skarzhiñ re an tu dehoù ha lakaad Mitterrand e penn ar Stad.



HANW hag hanw bihan

Chomlec'h

a gass e gomanant (gant distaol) da LE PEUPLE BRETON 40 F

a gass e gomanant (gant distaol) da LE PEUPLE BRETON ha da b/POBL VREIZH 70 L

a gass e gomanant-skoazell da LE PEUPLE BRETON (diwar 70 L)

Troc'hadenn da gass, gant an arc'hant, da LE PEUPLE BRETON BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

sadorn

teatr Penn-ar-Bed

QUILAPAYUN

Korolladegoù **DIHUN**

NAPHTALINE

PATRICK EWEN

CLAUDE NOUGARO

Fest-Nos vras

**Gant ar Bleizi-Ruz - Kanerien Vrasparz
kanerion Bro-Gwened**

**gouel
pobl
vreizh**

13-14 a vezheven

Brest

Gouel pobl Vreizh

(tachenn Penfell)

sul

BASHUNG

Bagad Brest Sant-Mark

Yvon ETIENNE

Teatr : Strollad ar Vro Bagan

IDIR

Epad an daou zewezh : standoù e-leizh

artisanslezh - c'hoarioù - boued ha banneoù - abadennoù ewid ar vugale

sinema diskouezadeg : bandennoù tresset Breizh

